

GWERZ GAREN AR BRIS

Var eun ton trist.

Person Caouen a lavare,
En prôn an ofern, eur sul a oe :
« Otro Doue, emem. Caouenniz,
Eur c'héluou trist zo'n oc'h iliz.
Arri a zo eun decret nevé,
Deut deméuz abeurz ar Roue,
Da l'oret e vo ret cavet
Ar c'horfou guellan euz ar oerzet,
En haou Doue, me o suph,
En Lanhuon n'em geved c'hui,
Cri vije ar galon, ma na ouelje,
En ker Lanhuon, nep a vije,
O velet Caouen ha Plouber
Bihan a bras o'ond eu ker ;
O voelet Caouenniz o vellan
Qued a felle de fatilian.
Plouberiz a nevez teonet.
Gant Caouenniz van ar billet ;
Manet ec'h e Caouenniz
Digouet e da Garen ar briz.

Garen a Bris a deplore,
Ne gavje den e consolje :
Ne givde d'en den gonsoli,
Merd e daëron pa oa arri :
« Ma fillor paour, na velet quet,
Serviji ar Roue zo ret,
Me na rajen fors vit partian,
Penevert ma mamm a zo cian :
E man var e guele seiz vla-zo
Ha ne deuz nemerdon var he zro.

Garen ar Bris a hirvoude.
An nor var e vamm pa diore :
« Sevet, ma mamm baour a lere,
Ma rin c'hoas eur vech o quele.
— Pe te zo skuiz ouz ma guelet ?
Pe te zo squis gant ma c'hleuvet ?
— Ne non ket skuiz ous o guelet,
Na quen neubeut gant o-glemvet :
O tenna d'ar billet ez on bed,
Zoudart 'vit Caouen ou laquet. »

Pa voant o daou o teplori,
E c'haute e gamarad e ti,
Hac a lavaraz evel-hen,
'Neur antren, d'ar paour garen :
« Hastit ma c'honsort depechan,
Ma c'heomb da Guengamp da lojan.
— Me ne rajen fors vit partian,
Penevert ma mamm a zo clan :
E man var e guele seiz vla-zo
Ha ne deuz nemerdon var he zro. »

Garen ar Bris a deplore,
An nor var e vamm pa serre :
« Me lar dec'h ma mamm, kenavo
Er barados ni n'em velo. »
Da vates ar person a laraz,
E presbyter Caouen pa arriaz :
« Dalet, mitez ma alhoueou,
Soignit ma mamm baour a vechou.
« Lequet oc'h alhoueou lec'h ma querfet
E lec'h ma c'hlequet o c'hefet. »
Neuze e larraz d'ar person,
O sonjel cat consolation :
« Person Caouen m'ar am c'heret,
Ma alhou ou diganin-me quemeret ;
Recommandet ma mam'n hoc'h ofern bred
Ma iel an dud vad de guelet
— Lequet, eme person Caouen,
A lavaraz d'ar paour Garen,
Lequet oc'h alhoueou lec'h ma querfet,
E lec'h ma c'hlequet o c'hefet. »

« Otro Sant Garen, ma fiéron,
Gret ivi-ton eun donézon :
Lequet o cleier da zon canvo.
D'am mammie paour pa vo maro,
'Vit ma c'hellin, pa o c'hlévi,
Donet d'ar gær d'he c'hinterri :
Rac pa e dil-zet, ha hi clan,
Gand an dud, ba bartian,
E vo ive pa vo maro,
M'ar ne vent quet var he zro. »

Eun de pa oa Garen en arme,
Pemb cant leo demeus e gontre,
E scoas eur c'hlaouen 'n he galon,
O clevet cleier Caouen o son.
Ar Zant a nevoa roet dean
Pez neva goulet digantan :
Rac ar c'hleier a zone canvo
D'he vamm baour a voa maro.
Ractal e laraz d'he gabiten,
En eur ouela evel-hen :

« Iscuiz ma c'habiten, a c'houlan
Prest é ma chalou da rannan :
Me gleo cleier Caouen o son canvo,
D'am mammie paour a zo maro.
— Penaoz a oufes clevet ane,
Ha te pemb cant leo dioute ?
— O troad var ma hini lequet
Hac evel-d'hon-me o c'hlevfet,
— Dalet-ta he conje, Garen,
Hac en em rentet e Caouen, »

Garen ar Bris'a vonjoure,
K bourg Caouen pa arrue :
« De bonjour dec'h-hu, Caouenniz,
Petra a zo a neve n'hoc'h illiz ?
— Garen, na comprenomb netra
Ni en asur en quemant-ma
E man ar ch'leier o zon tri miz zo,
Hep ma zo den beo var o zro.
Tri miz zo e maint er guiz-ze,
Hep ma neuz den touchet out-he.

Garen ar Bris a lavare,
An n'or var e vamm, pa diore :
« Me vel ma mamm, ez oc'h dilezet
Aboue c'hon-me partiet,
Rac var an treuzo a velan
E c'he lezet ar teoda divoan ;
Pa antreaz ebars an ti.
Ar Ver'ches voa ouz e lieni.
A vriet ne vamm'e crogaet
Ha var ar plas e c'he marvet ;

AR MEMEZ TRA

« Ar bed oll, eme lan goz, a gemer eur stum fall,
Neeze chomet wa'r an douar-man netra velma oa gwec'hall,
Paour kez lann, c'hui zo chanced, dre m'oc'h deued ;

[da c'hriza
Mez ar bed a zo chomet memez tra, memez tra,

Goude al loar, ar stered hag an devalijen,
Gant an heol bep mintin e par ar sklerijen,

Bars an oabl an alc'hueder a zao en eur gana,
Vel eun amzer tremenet, memez tra, memez tra,

Gant he chupen erc'h skornet, pa zeu ar gouan'gril
Da c'hourd' hon bizied ha ruia hor fri,

Ann eil demuez egle daou bried a dosta
Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra,

Ar yugale a zo breman begek, beo ha seder
War meur a dra, int gwiek' arog goud ho Fater,

An avalo hanvrued o blij d'he ar muis,
Vel eun amzer tremenet, memez tra, memez tra,

An diaoul a gollaz Eva, bepred a zo temptuz,
Ar merc'hed koant a zo' atao bresk ha sentuz,

Demeus ar frouez diffennet, kalz ziouz ! a glanva,
Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra,

Potret a weler bemde ho wapad merc'hed ;
Merc'hed a weler ho kaketai potred ;

Touet kalz, derc'het neubeud, a zo ar c'hiz brema ;
Vel eun amzer tremenet memez tra, memez tra,

Nemed ar brago toul-gwis, a lera marelet,
Ar jela'n kov-iodeck, ar beruten poultret,

Pez a chom a zo ch' med ebars ar stad ma oa,
Vel an amzer tremenet, memez tra, memez tra,

(Proprieté)